

CANTIC ITRON-VARIA LANN-RIOT.

Ton : *Ni ho salud stereden vor.*

DISKAN.

Henor da Verc'hez Lann-Riot,
A zo sikour ar martolot,
Esperans ar mamou christen,
Ha souten al labourerien.


E Moëlan, e ribl ar mor,
Eur chapelic a zo digor,
Hag enn hi Guerc'hez Lann-Riot,
Mari guir vam ar martolot.

O Mari, pa c'houezo an-aet,
Hema zonjo en ho chapel !
Euz ho chapel, mirit bepred,
He lestric paour na ve flasret !

E Lann-Riot tal ar mesiou,
E creiz ar guez hag ho bleuniou,
Eur chapelic a bign en er,
Evit nerza al labourer.

Ma skuiz hema gant he labour,
O Mari, roit prim ho sikour,
Ha pa bedo en ho chapel,
Ra zanto ractal ho skoazel !

An ebestel, var ar mor glaz,
Guechall ivez a besketaz ;
Mez pesk ne deu en ho rouejou,
Ken a goms Jesus an aotrou.



O Mari, c'houi bedo Jesus,
Ma vo ouzomp trugarezus ;
Ha ma lâro vid-omp ar ger
A ro chans vad d'ar pesketer !

An oll her goar, ar c'hreunen ed
En douar guechou a ve collet ;
Mez ma zeu Doue da barlant
E lec'h unan ve cavet cant.

C'houi c'houlenno, Guerc'hez Vari,
Ma brofito hor parkou-ni,
M'hor bezo cant e lec'h unan,
Da nebeuta, digoll hor poan !

Ho mab Jesus en deuz prijet,
Gant ho lez pur, beza maget ;
Peb mam ivez en ho chapel,
A gavo lez vit he bugel.

Penoz sonjal en ho Mabic
Ha dilezel ar bugelic,
A varvo sur, var he barlen
Ma na roit d'he vam he goulen,

Labourer douar, ha martolot
A zeui a bell da Lann-Riot,
A ziredo evit pedi
A ziredo evit meuli.

Mez evidomp-ni Molanis,
Mar hon eus savet hoc'h ilis,
Bezit mui c'hoas ar Verc'hez ker
Hon diouallo a bep danger.

CANTIC ALL.

Ton : *Kelven.*

DISKAN.

Santez Mari Mam Doue, patronez Lann-Riot,
Clevit mouez al labourer, peden ar martolot ;
Pa skuizimp en hon labour, pa grenimp var ar mour
Sellit ouzomp a druez, roit d'eomp bepred sicour.

Hon tadou koz tud a feiz, tud a relijion,
Var bord ar mor e Molan 'vit ho devotion,
Ho devoa eur chapelic leshanvet Lann-Riot ;
Lec'h ma pede calouneec couer ha martolot.

Eun amzer drist a zeuas, an dud vad oue chasheet :
Dre urs tud fall ha difeiz, ar chapel oue pilet ;
Mes d'hor Mam ato fidel, ni zeue dar plas santel
Dirag imach Lann-Riot da c'houlen he skoazel.

Canomp brema, christenien, canomp gant joausdet,
Canomp gloar ha menleudi d'ar Verc'hez venniget ;
Chetu savet a neve chapelic Lann-Riot ;
Pebez consolation evit ar martolot !

Ma 'n em gavit var ar mor e danger ho puez,
Galvit Mari gant fisians ; hi eo ho rouanez.
Lavarit a greiz calon ! O GUERC'HEZ LANN-RIOT !
Ractal Mari zicouro ar paourkez martolot.

Mad evit an dud a vor, Mari zo mad d'an oll,
N'e deuz nemet eun desir, ne zaio den da goll ;
Pa vec'h eta trubuillet, gant ar c'hlenvet goasket,
Pedit devot ar Verc'hez, sur e voc'h confortet.

An hini e deus maget hor Zalver gant he lez,
Evidoc'h, mamou christen, zo leun a vadelez :
Mar vank d'eoc'h magadurez 'vit souten ho pugel,
Deut gant ar brassa fisians da bedi d'ho chapel.

Biskoas, eme Sant-Bernard, biskoas ne oue clevet ;
Eur goulen gret da Vari a ve bet refuset ;
Ar Verc'hez a zo hirio ker galloudec ha dec'h,
Hag en despet d'an amzer ne ket berreet he brec'h.

Ar Verc'hez dinam a Lourd e menez Pyrene,
A ziskouez he zrugarez dre viractou bemde ;
Ar miraclou a vefomp e Lourd er Pyrene
Petra viro n'ho guellimp e Lann-Riot ive ?

Evel ar bardonerien a ia leun a fisians
Da glask buez ha iec'hed da e horn-se euz ar fraus,
Ni a zui d'hor chapelic gant eur fisians neve,
Da laret hon oll bouaniou a gorf hag a ene.

A vechou eur medesin kaer vo fisiout en-han,
Ne allo gant he skiant hor zicour pa vimp clan ;
Eun hor poaniou, christeniec'h, ni n'euz ben amprouet,
Itron-Varia Lann-Riot her-oc'h ar bed.

Pet soudart da Lann-Riot, kent PARTIAL GOESTLET
Zo bet, bennoz da Vari, er brezel diouallet !
E creiz danjeriou ar bed, pet e deuz conservet !
Bursudou a vadelez heb niver e deuz gret.

Pebez avantach eta evidomp, Molanis,
Hon deuz oll en em glevet da zével eun ilis
En honor da vam Jesus rouanez an elet
Prest kaer ato d'hor sicour kerkent ma vo pedet.

Itron-Varia Lann-Riot, refuj ar bec'herien,
Taulit eur zel a druez var ar bardonerien,
Ar re a zo deut hirio, ar re a zeui goude,
Ma zaiat d'an env d'ho meuli hed an eternite.